

CRISTIDIGUES

AN ÆST PRESENT

LAQUET EN RIM GANT YANN AR MINOUS.

Var an ton commun.

C'heomp c'hoas da succedin, me gred, d'ar goall vloavez,
Doue, zivoaz! na squiz-quet o rein dimp ar gernes ;
N'on p'he vit hon c'hastian, divoar benn hon c'hrimo,
P'he donet da distrujan, a grenn, ar sieclo.

Goechal, d'amzer ann deluch, ar bed quen corrompet
Zivoas! dre bep fallente, peb crim ha peb pec'het,
A aliras e voarnomp ann dour ar spontussan,
Oll exceptet eur famill a renchomp perissan.

Hirrie ann de na ouzon petra mui da zonjal,
Vit na man mui an deluch ar c'hlimat zo goall fall ;
Râl eo ann den a gonsery n'hon amzer he iec'het,
Calz a dud c'hoas a baquer bemde gant ar c'hlenvet.

Na voelomp quiet hon loenet ho coean oll d'ann douar,
Louzaouen fall an typhus oc'h adan ar glac'har,
En n'omb bras a venajo, a diegeso mat,
Forcet ezoup da laret e z'eo goall drist hon stad.

Mar boant goejal den joaüs eo ze din da damall,
Na meus mui goud da c'hoarzin, quen neubeut da far-
Maro e z'eo evid'hon couls evel vit ann oll, [sal ;
A grenn ar blijadures, o Doue pebes coll !

Ia, deus ar bloa so, voelan ha tamm pe damm ouspenn,
Zammet dime ma c'halon gant ar bec'h-ze quen tenn,
Hannvet dre-oll ar glac'har, ann hirvoud, ann anquen,
Piou zo aman na danva ar memes pinijen.

Na zonjan-quiet ve unan a ouffe lavaret,
Na zantfe quiet, evel-d'hon, he galon glac'haret,
Goude quement a vrezel, a disput, a chican,
A glenvet hag a vizer, a guernes hag a boan.

Piou herrie a zo joaüs, piou herrie a zo gai,
Piou ouffe solenizan gant plijadur miz mai ;
Eur miz eo deus ar goellan, ia, evit ar fleurrio,
Mæs eur miz deus ar fallan d'eur certen treo a zo.

Baleet en ho jardin a c'houi zanto c'hoez vad,
Mar benvet gant boquedou oc'h evurus n'ho stad,
Mæs mar rencquet, evel-d'hon, bevan ive gand ed,
Cesset buan da boulmen, ma breudeur, me ho ped.

C'homan n'eo quiet eun amzer d'en eum divertissan,
D'en em rein d'ar blijadur, da joaio ar bed-man ;
Mæs epquen da veditan voar secrejo Doue,
D'hen estimout, d'henn caret, da c'heuil he volante.

Na voelomp quiet adarre dimp-ni eur goal zec'hour ?
A belec'h fructifise pelloc'h mui hon labour ?
Ze oll a zo impossubl zellet ouz ho parco,
Hac ac'hane a jufet eun tamm goel ma c'homzo.

Deus guenin 'ta, menager, d'ober eun tamm bale,
Breman en dro d'as parco ma voelfomp ac'hane,
Hac in a zo apparans deuz eun æst abundant,
A boan pen, a boan speret, plijadur p'he dourmant.

Zell ouz da dachen ouiniz penoz e z'eo tano,
Ouspenn c'hoas e z'eo taguet gant eur vanden louzo ;
I labour a teus da c'hoenat, da grozal, ma mignon,
Mar g'eo stanq da elphezant, stancoc'h eo da drechon.

Zell ive c'hoas eur momet ouz da dachenic heï,
Crog-mat e z'eo da ganan spaln ar *Miserere mei*,
Na voelez quiet anezi, ma mignon, ho chanj liou,
Prestic a rencqo ober, me gred, unan a diou.

Tell d'ez sa dougue troet dei en melen,
Me gred eo he c'hroaz nouen p'acet dei n'he c'herc'hen,
Quimiat diouti hardi ma na deu prest ar glao,
En he flas man ho fontan, na zao mui en he zao.

Zell ive c'hoas, ma mignon, ouz ann dachen guerc'h-ze,
Pehini ez poa hadet, en bolante Doue,
Na voeles, quet anezi ravajet, distrujet ?
Allas ! ar scorn, ar zec'hour enn'hi a zo croguet.

Ped parc na teus quet renquet, sivoaz ! da disharat,
En van goude had hadan. o pebes calonat !!!
Mæs da betra mui pec'hin ze na zervij aetra,
Doue a gav mad bepred emean pes a ra.

Mar teus c'hoant d'ambelissan c'hoas da dristidiguez,
Deus guenin-me da voelet da dachen patates,
Mæs arabet vo dide guinchal n'hac ober trouz,
Ha p'he voelfes ho deillo eunn tamm ho vean rouz.

En em gonzoll, ma mignon, na vez pelloc'h genet,
Evit-he oll da rouzan na mangt mui en clenvet :
C'homan a zo eur voalen deut vit o avortin ;
Mui ze ebars ann douar e c'hallongt oll criguin.

Deus guenin ta, menager, d'ober eunn tamm bale
En dro d'az tachen vélchon ma voelfomp ac'hane
Hac hin zo moyen dêzi da bignal ouzcroec'h
Deut e z'eo dec'h avortin, zivoas, ann amzer zec'h.

Couita buan anezi ha deus ganin d'ar prad,
Mar queres sur a lari penos he teus foen mad,
Na laran quet n'az pe quet ; mæs, cred eun dra zo guir,
Zo quet oll ann avantach vel d'out da gad foen hir.

Mar queres c'hoas a lari a teus plous leiz da leur,
Na laran quet n'az pe quet, ha couscoude, ma breur,
M'az pije plouz a vroc'hel boe pell-a-zo hep mar
Te as pije bet disquet ann hent da vont d'ar gar.

Eur chanz e z'eo evidout mar teus plouz a vroc'hel,
Zivoaz ! en cals a blaso, ar bergnio zo izel ;
Nep tam mui da c'houzeian en certen plas a zo,
Mar goud en plous pinvidie lavar e zoud autrou.

Da vla ive, ma mignon, ha pretanti n'a rez
Cargan he c'hov, p'ha gari, da vouir vamen al læz,
En em distromp, mar querez, ha na ra mui a drouz
Da vla ive a voeli, zivoas goel just ar plouz.

Querz primm da di ar boucher groa dean dont guenit
Discar loenet d'ann douar ; me a ra aviz dit.
Ro quic d'as tud da zibrin ha te c'hoas déb ive ;
N'ho lez quet da vartirisan quement en paourante.

Ma na rez quet ann dra-ze, ma mignon, a voeli
C'hoas goalen vraz eun Doue ho vonet en impli.
O tiscar dit da loened dre voien ann typhus,
Clenvet meurbet evit-hé quement contagius.

C'homman a zo eur recit composet a neve
Divoar ben ar goualennier a ro dimp-ni Doue,
Ebars ar blavez prezant, dre voyent fall hon æst
Ann natur oll en antier a guement-man zo test.

Ar gouir auteur diouti mar fell dec'hu élêvet,
Ma breudeur, Yann ar Minouz, vit gouir a zo hanvet,
Ed deus ar bed pa garin e c'halin lavaret,
A meus meur a ganouen hac a voerz composet.

Al leac'h deus ma domicil, ma breudeur, c'hoas a zo,
En parous Pleuveur-Gautier eno c'honi em c'havo
Eur veach a beb eiz-de, ia, pe a beb pemzec,
Evit gonit ma bara dre oll me renq redec.

Herrie e zon en Treguer hac arc'hoas en Goello,
Ann de voarlerc'h en Querneo, en Leon-a voejo,
Mæs ral e-z-éo ar veach e-z-an d'ar Mor-Bihan,
Ma c'haffen di da ganan a c'hoersfe peb unan.

IANN AR MINOuz.

FIN.

(Propriété.)

